

13

C'houi'peuz digaset deomp gwechall  
Santez Jeann d'Ark, p'edo Bro-C'hall  
Dare da vervel gant anken;  
Didan seul pouner an estren.

14

Goude brezeliou didruez  
Bro-C'hall adarre 'deus enkreuz:  
Deuit eur wech c'hoaz, arc'hel santel,  
Da zigas dezi ho skoazel.

15

Grit deomp lakât da ren ar vro  
Kristenien start hag a ouezo  
Ober a-nevez eus Bro-C'hall  
Gwir zoudard Doue'vel gwechall.

A. G.

IMPRIMATUR

Quimper, 10 a viz Ebrel 1951

J. CADIOU

Vikel. vras.

8N2-3-052

# Meuledi ha Pedenn da Zant Mikael

## Patron Chapel Sant-Mikael e Plougerne

Ton: *Rumengol*

Diskan;

O Sant Mikael, hor zant Patron  
Deskit deomp stourm gant nerz-kalon  
Evit enor ha gloar Doue  
Ha silvidigez hon ene

1

Er Skritur-Sakr, ni'wel en nenv  
A-nevez krouet gant Doue,  
Elez milliget Lusifer  
O sevel eneb o c'hrouer.

2

Penaoz, hi kaer hag evurus,  
Eo deut o c'halon ken lore'hus  
Ma klaskont beza par deza  
E leac'h e garet dreist peb tra?

3

Met c'houi oa eno, Sant Mikael,  
E penn an holl elez fidel,  
Evel eur marc'heg er stourmad  
Gantan eur c'hleze temzèt mat.



4

Setu raktal an elez fall  
Stlapet en itern da yudal,  
Ha kaset pell diouz o Doue  
Evit an holl eternite.

5

Siouaz! ni wel emaint hirio  
Bepred o rêdal war hon tro  
Oc'h ober droug war an douar  
Evel leoned e kounnar.

6

Hag e touellont an dud keiz  
Dre ar c'hoantegeziou direiz  
Hag ar froudennou diskiant  
A lakont enno da ziouan.

7

Missioner santel hon Arvor  
Mikael an Nobletz, ho filhor,  
War e daolennou a verkas  
An techou fall a voug ar c'hras.

8

Morse ne c'hellimp kounac'hat  
Kenteliou kaer hor c'henvroad

Mel hor skoazellit, sant Patron,  
D'o skriva doun en hor c'halon.

9

Grit deomp kaout euz ouz an techou  
A zoug an den d'ar pec'hejou  
Ha beza bemdez war evez  
E labour hor zilvidigez.

10

Pa vez dievez war an dour  
An den a vor, ar pesketour  
Abred eur barrad gwall-amzer  
A strink e vag ouz ar reier.

11

Grit ivez deomp chom unanet  
En dro d'hon tenzor benniget  
Ar Feiz a heuliaz hon tud koz  
Hag a verk hent ar baradoz.

12

Mirit na wellfet war hon tro  
Trubarded a ve mall ganto  
Evit plijadur pe arc'hant  
Besa mevelien da Zatan.